



21

Vol 9041

# CANTIC

## MISSIONN PARROZ CAVAN

ER BLA 1864. (Tradou {Forastier  
Delapiz + Comit.})

Var don : *Guerz Boudedéau*, pe don : *Elez eus  
ar Baradoz.*

---

Ecce sto ad ostium, et pulso; si  
quis audierit vocem meam, et  
aperuit mihi januam, intrabo ad  
illum, et cœnabo cum illo, et ipse  
mecum. — *Apoc. C. 3, v. 20.*

Bars ar blavez mil eiz cant pevar ha tri ugent  
Goude an donédiguez deus a Roue ar Sent,  
Ar sul eizvet varnuguent demeus a viz c'huevrer,  
So digoret en *Cavan* diou sunvez meurbed caër.  
Doue leun a garantez a deu da visita  
Ar bopl ze evel gueich all brema so daou c'hant vla.  
Mez ar burzudou spountuz oa neuse c'hoarvezet  
Epad ar missionn ma n'ho deus bet lec'h ebet.

Na veler ha na glever luhed na curunou  
O disquenn en *Templ santel* a leiz deus an Envou.  
Beza so c'hoas moyennou da douich ar bec'herien  
Ha d'ho had lacquat en graç gant ar Mestr souveren.  
Demeus he beurz int galvet da donet d'eur banqued :  
N'en deus quet vit an ine diliciussoc'h boed !  
Hanval ous ar Map prodic, prest e clasquont eun Tad  
En andred he grouadur en pep amser quen mad.  
A dra sur, ma broïz quer, rencquet e so poania  
Evit quelenn aneze ha gallout ho henchra :  
Rac arri evoant dija pell demeus ho guir vro,  
Darn, marteze, oa cousquet voar vord an abymou !  
Jesus bepred truezus ous hon sempladurez  
A digass Messajerien carguet a santelez (1)  
Da dilivra Cavanis deus chadennou Satan  
Ha da scuil en ho c'halon gliz douz ar Spered-Glan !  
Mar d'eo bet stard ho labour o deus bet ive joa,  
A dalec an heur guenta betec an diveza :  
Rac ar parossianiz so diredet bemde (2)  
Da chelaou ho aviziou ha da senti oute.  
A guichen ma strinc an de quen a ve don an noz (3)  
Souden an ilis a so chenchet en baradoz,  
Gant an dud stanc vel quelyen o clevet mouez Doue,  
O pidi hac o veuli dalc'h mad he Vajeste.  
Pa gommanç ar c'hanticou, pebeuz ravissamant !  
Heuliet int gant eun accord deus ar muya chalmant !  
Na gredan quet ve bizeoaz bet en nep Missionn  
Brassoc'h urz, crenvoc'h fervor, leunoc'h devotion.  
Perac? — Pastor ar barroz en deveus bet sourci  
Dre eun acqued admirapl pell so da brepari  
An tensoriou precius deus ar silvidiguez  
Presantet en deïou-ma d'he zenvedigou quez.  
N'hem ententet ez int bet da sicour aneza  
Da gaout eur Groas Missionn unan ar re vrava

(1) Ar sun guenta eo bed, an autronez Forestier ha Délizir, tadou  
jesuisted, hac an eil sun eo bed an tad Coniat en plaç an tad Délizir.

(2) An diavezourien a so bet dent ine a leiz.

(3) An *Angelus* a sonne da beder heur; mez an ilis a rencquet  
da digueri ahès quentoc'h d'an dud.

A so bet digant Hernot coustet tost da vil scoëd.  
Bars an antre ar vered eo ar syn sacr placet.

Ornet eo c'hoaz an ilis 'n'eur feçon deread :  
Mez piou benac var ar chœur a dol he zaoulagad  
A sant eun tomder nerzus, pa vel an tri zrôn caër  
A so quempenet eno en quever an Auter.

Var an hini creiz e ma relegou sant Caran,  
Ar patron carantezuz deus ar barroz Cavan :  
Al liou ruz pini a doug a discuez demp scler mad  
Penos vit he Vestr divin en deus scuillet he voad.

Var an hini guen a deo e repos ar Verc'hes,  
Mamm hon Salver biniguet, pebeuz avocades !  
He diou vrec'h sacr so digor vit receo hon c'hlemmou,  
Ha vit obten d'ar pec'her pardon deus he girimou.

An hini guen a n'hem gav en tu an Aviel  
So varna imaich Joseph ar Patriarch santel,  
Crog en dorn ar buguelic vit hon prena ganet  
Var eur voul steredennet a represent ar bed.

Quemend potr so er barroz en hano ar sant-ma  
En deus reit pevar real da sicour he baëa,  
Evit m'hem devezo sonch bars an heur ar maro  
Da bresanti ho ine da Jesus hon Autrou.

A roc an exercissou so pep a oféren (1)  
Celebret aben seiz heur gant an oll veleyen ;  
Ha prestic e ve laret hini ar Missioun,  
Quercouls vit mad ar re veo vel vit an anaoun.

---

(1) Chetu ama an darn vuya deus an exerciçon all epad ar Mission :

1<sup>o</sup> Pedennou deus ar mintin, chapeled, procession ar Verc'hes,  
ha salud ar Sacramand.

2<sup>o</sup> An Tadou missionnerien o deuves gred bemde da viana pep  
a diou sarmon pere a dome hac a bruzune ar c'halonou ar muya  
caledet hac a re d'an oll scuill daëlou.

3<sup>o</sup> Bep sadorn, goude ar gommunion, e vije biniguet ar c'hroa-  
jou, ar chapeledou, etc. , etc, hac ar vugale na devoa gret Pasq  
ebed.

4<sup>o</sup> Ar sul diveza, 15 a veurz, eo bet biniguet Croas ar Missionn ;  
bet so sarmon gaër : goude so bet eur c'himiad truezus entre an  
Tadou santel, hac ar bopl fidel ha neuse entre an Tadou ha be-  
leyen mad Cavan. Fimisset so bet dre eun *Te Deum* ha benediction  
ar Sacramand.

An dud varo, a velomp, n'int quet bet ancouet ;  
Ar beorien gant largentez so ive soulajet  
Pe dre brejou en tyez, dre arc'hant pe vara,  
Vit ober deze caout lod en fest an oan guella.

Pa veler ar G'hristenien bars ar seurt santimand  
Eo goal inutil goulenn hac hy o deveus c'hoant  
Da guerzet dre an hend stris a so deze mercquet  
Evit arrivout eun de er guir eürusdet.

Hastet o deus n'hém vuela'hi er pincin a vue ;  
Pep a diou gommunion o deveus gret goude : (1)  
Er peder breuriez a vern int bet n'hém arrollet, (2)  
Abalamour d'ar graçou a so oute staguet.

Discleriet e so deze peguen rust combajou  
So ama enep ar bed hac an drouc sperejou :  
Quemeret o deus armou vit gallout n'hém divoall  
Gant aoun, siouaz ! na goëjent adarre er roud fall.

Hy, couls hac ho bugale, a deuio aliès  
D'ar vered vit saludi mercq ho silvidiguez,  
Ha da bedi calonec vit ar vedecinet  
O deveus sicouret rei d'ho ine ar yec'hed.

Na vo quet collet 'vitè an distera comps vad  
Deus ar Vissionnerien, dreist oll de ho c'himiad,  
Na quen nebeut ar re vo abeurz ho fastored  
Divezatoc'h er gador dirac-he prononcet.

Mil drugarez, d'an Drindet, Tad, Map ha Speret-Glan,  
Evit faveriou hep priz ! habitantet Cavan,  
Meulomp Rouanès an Env, ar Sent hac an Elez,  
Da c'hortos ho c'hontempli hed an Eternite.

---

(1) Tud ar barros, ar guenta vit ho fasq, hac an eil vit an anaoun ;  
An diavezourien, ar guenta evit ho mission, hac an eil evit ho fasq.

(2) Breuriez ar Rozera ; Breuriez Carmès pe an Habid-Bian ;  
Breuriez St-Joseph, patron ar maro mad, en pehini na ve recevet  
nemed potred ; hac hini Propagation ar Fe.